



Kasour·ez

Kinnig labour embannet d'an / ar lundì 23 février 2026

Lec'h : **Karaez**

Doare post **CDD** H/F

Padelezh **2 viz hanter**

01/04/2026

Deskrivadur ar post-labour

Emañ Diwan o klask war-lerc'h ur c'h-gasour·ez evit al Lise Diwan Karaez.

Post CDD erlec'hiañ 29 e/sizhun – 2 nozvezh (14e50 d'ar merc'her + 14e50 d'ar yaou)

Adalek ar 01/04 betek an 19/06/2026

O labourat dindan atebegzh penngasouriezh an ti-skol e vo fiziet ennoc'h :

Evezhiañ al liseidi

Buheziñ ar skolaj-lise (beilhadegoù, stalioù dizarbenn, bodadoù liammet gant ar skolajidi ha liseidi, surentez, yec'hed...)

Daremprediñ gant ar gerent diouzh an ezhommoù

Kenlabourat gant ar skipailh renerezh, kelenn, melestradurezh

Titouroù all :

CDD 29 e/sizhun :

Merc'her noz: 14e50

Yaou noz : 14e50

Lec'h labour : Karaez

Gwarez yec'hed hag ur prevoyañs

Gopr eurioù kriz : 12,047 €

Ma 'z oc'h dedennet gant ar post, trugarez da gas hoc'h emstrivadur (CV + lizher en em ginnig) da

tuta@diwan.bzh ha gant penngasouriezh.lise.karaez@diwan.bzh e kopi.

Skiant-prenet ha barrezhioù goulennet

Doare den :

Live B2 e brezhoneg degemeret mat. Brezhoneg komzet ha skrivet mat a-walc'h evit bevañ e brezhoneg pe/hag evit sikour al liseidi,

Live Bak,

Bezañ en e aes evit daremprediñ gant ar grennarded,

Plijet gant al labour a-stroll.